

Supplément

DA VARZED KEMRI**KANAOUEN (1)**

Ra vezit deut-mad, kenvreudeur,
Barzed helavar a Vreiz-Veur,
Pa c'heuz prizet treuzi ar mor,
'Vit starda dorn breudeur Arvor !

Stignet kerden ho telennou
Da gana d'emp kanaouennou,
Kanaouennou kaer ar varzed
Savet enn amzer dremenet.

Lavaret d'emp hirio penaoz,
Penaoz, siouaz ! enn oajou koz,
Eo c'hoarvezet ann disparti
Etre hor breudeur ker ha ni.

Kanet diwar benn ann Druzed
Enn ho dorn ar falz alaouret,
Ho baro hirr, ho zaeou gwenn,
O prezeg war lein ann dol-men.

(1) Tennet diouz ar *Revue de Bretagne*, miz Genver 1868. En hevelep rummen ez eus eun artikl gret gant Kermarker var ar *Bombard Kerne*.

Kanit ar bobl nerzuz meurbet,
An dud gallouduz deuz bernet
Ar c'herrek pounner bern-war-vern,
Evit bezia ho fenn-tiern ;

O deuz savet toliou, peulioù
Sounn, goude kalz a ganvedou
Sounn hag o lavaret bepred :
« Bro Breiz-Izel na varvo ket ! »

Kanit ivez a vouez huel
An emgann ruz hag ar brezel,
Ar roue ter, ar roue gwir
Arzur hag he gleze meur dir,

Pignet war he varc'h glaz sternet,
P'en em strinke ken kounnaret
E kreiz stroll ann enebourien
Hag ho flastre evel merien.

Kanit Riwall ann diouganer,
Riwall ar barz hag ar goaper,
War eur skubelen a c'haoliad
O nijal war zu ar zabat ;

En dro d'ezhan stroll ann diaoulou
O iudal heuzuz er meziou,
Ar c'horred du war an dorgenn
Penfollet gant ann abaden.

An ouc'hed vor o soroc'ha,
Ar vor gezek o c'hourina
War grib eonus ar gwagennou
Pa ziroll stourm ha kurunou ;

Ar mor-verc'h koant ken traitourez,
Hanter pesk ha hanter vaouez,
O kana flour d'ar verdaidi
Da lakat brevi ho listri.

Kanit bro ann Hiberni glaz,
Bro ar verzerien, ar zent braz :
Efflam, Renan, Ke ha Sane,
Sent leun a feiz, a garante,

A ziskennaz enn Breiz-Izel,
'Vit prezeg d'emp ann Aviel,
A zavaz war gern ar paulven
Kroazou skedennuz Mab-ann-den ;

Hag hon diskaz da azeuli
Ar mab ganet er marchosi,
Ni tud direiz n'hon doa biskoaz
Stouet hor penn dirag nep goaz.

Tridall a ra hor c'halonnou
O klevet iez hor gourdadou,
Hag ann delenn o sini c'houek
Enn douar zantel Sant-Briek.

Setu va dorn, Kenvroidi!
Ha teir iouc'haden 'vit Kemri!
Ia ! daoust d'ann amzer, daoust d'ar mor,
Breur eo Kemro da vab Arvor !

